


# GUERZ NEVEZ



Var un ton nevez.



**M**AM be aoualc'h a studi, a speret da rima,  
Hac ur bluen em dorn, ba me prest da serif'a,  
Me gompose ur reglen ervez va santimant,  
Var sujet un atretien entre daouzen yaouane.

Mes quent avanç davintach me c'houlen asistanç  
Eus ar saerejou cañra quent evit e c'hommanç,  
Da rei lumer d'am speret pa meus occasion  
Da ober ur son nevez evr z va intantion.

Pa lenan ul leor bian zo en cayer va study,  
Me a gay traou surprenabl hac a ra chagrin din,  
Pa lenañ i va flineten scrifen gand va mestres,  
Eus va brassa plijadur me meus tristidiguez.

Pa voan ebars em jardia em oll gontantamant,  
Me remercas ur fleuren a voi yiè ha brillant,  
Quent brillant e voi e deillou hac au col ardant,  
Pa deu dezan para ebars ar firmamant.

Ounnes zo ur fleuren eus a velanconi,  
Antreet douz em c'halon ha diez da eff-ci;  
Prinç an oll amouroustet, rone an dud yaouane,  
E c'hundu dre e sellou d'aur rentan languissant.

Quenta m'a n boe an enor da velet va mestres,  
E voi er porchet gou'e an oferen ired ;  
An eil grec'h ma e guelis assuri a ellan  
E voi bars en illi bet e communia.

O ober e lasq quenta e mesq ar vugale,  
D'ar poent-ze e voi yaouane ha me a voi ive ;  
Aben ur peunat gou'e iris d'ar scol da Guengamp  
Hac hi et meimes auver a voi bats ur gouant.

Ma tenis da zilezel va education,  
Evit dont d'e antreteli eus a greis va c'halon,  
Evit dont da antreteli Rouannes ar fleuriou,  
Hac eus ar c'haëra fleur a zo er jard nou.

Ounnes a zo eur fleuren a velanconi,  
Caeroc'h evit fourdelis nac ive romani,  
Am eus dezi goenvi assuri a ellan,  
E lacai va c'halon var ar poent da rannan.

An eil d'e a vis eost me lacas em speret  
Hac ive em fant si mont da velet merc'het,  
Mont da velet va mestres, Rouannes va c'halon,  
Va oll desir er bed-mâ, va inclination.

Debonjour déc'h va mestres, an devez a birie,  
Gant ur galon gontant evel zo ganeme,  
Couscoude pa en eui sonjha e voi din lavaret,  
Ne ran nemet coll amzer o tonnet d'ho cuelet.

Sot oc'h sur, va servicher, ma teuit da gredi  
Ar goa! deodou milliguet, zo o elasq hor separé ;  
Ha pa vec'h din dispennet quer munut bag ar pell,  
Se ne rafe qet din-me donet d'ho dilezel.

Pell so deus a amzer me am boa desiré  
E teujac'h d'am saludi evel va muia caret,

Ne larec'h guer ebet, ne rec'h qet a seblant,  
Me 'm boa dislijadur, mar e doa plac'h yaouanc.

Traitourez milliguet ! chenchiit ho preposiou,  
Rae desfanç a rit din pa lavarit ho couzou,  
Rae desfanç a rit din na élavan ho couzou  
Ebars cayer va studi demens ho preposiou.

Eteal, va servicher, va c'hredi a ellet,  
Rae me sinfe gand va goad ar pez a mens laret.  
Delc'het d'au darempredi a bet fiel din me,  
Biquen na vemp separet an eil diouz éguile.

Qen a deuio une d'hor guervel evit a vech diveza,  
Da vonet da réala cont da Grôuer ar bed-mâ,  
Qen a deuio ar maro da fioi-a hor bue,  
Biqen na vemp separet an eil ouz éguile.

Me meus guelet va-nnan differanç diouzin,  
Mari, Mari, va mestres, eus ho tare npredi,  
Ha tud a zo puissant, o deus renq ha leye,  
Me na meus qet a vadou, gou'e aouïc'h a rit-se.

Ouspen da gu-ment-se zo enei, va servicher,  
Ar malou bag an arc'hant a eller da ob'r ;  
Un den a vez demezet enep e santioant,  
N'ell qet terri e gontrat evit aour nac arc'hant.

Qement zo var un donar ga-t va Done crout,  
An oll aor, an oll arc'hant en ur pres destamet,  
Hac e vent roet dime ne ven qet c'hoas contant,  
Ma d'au be qet ar boner da possedi va c'hoant.

Me a mens grêt ur bojet demens a zivision  
Ennay d'au mestrice passelais d'e v'halon,  
Hac a mens grêt anezan dimens a huanaid  
A lacaio d'en erren ur rihan eus va goad.

O tistrei eus ar pardon, ha var leia ar mebe,  
Un devez dreist ar re all hi varas di-sme :  
Ma na guerit chanch a gont'e pellat diouzin ,  
Ar goa! deodou milliguet a glasq hor separé.

Ounnes eo ar bromesse o poa-hu dime grêt  
Diveza m'am boe an enor va mestres d'o cuelet!  
Chou'i a brometas dime hac ive dre o le  
Na viimp qet separet evit deos ho coste.

Varben un neubent gonde int be dispartiet,  
An effet eus ho couzou a zo bet eprouvet ;  
N'eus netra var an douar m'el assuri ervalet  
A sco un tol qen mortel evel ur goa! deodat.

Pa voan ebars em gu-le nos gouel ar Rouane,  
Me glêve un eün em jardiz hac a gane yiè ;  
Lavares a ré facil an eün dre e son :  
E ma da vuia-caret en desolation.

Deus ar mintin pa savis, me scrifas ul lizer  
Da gaç d'au muia caret dre dorn ur messager,  
Da glêvet e santimant evit ar vech diveza,  
Guell eo mervel buan eguet chom da languissa.

Pa errus ar messager ebars ty va mestres,  
E voe diguemeret mal evit e ziveza guech.  
Qemer eure al lizer bac antren en e c'hambr  
Da scrifa din va c'horje neuze soudent vantant.

O setaç a c'houennit, emei, va servicher,  
Assuret o'ch d'e havet, ia, en bér amzer ;  
Ma visac'h d'am sanitmant, mad ec'h ellit credit  
Na voa nemet ar maro cap-bl d'hon separi.

Mes na breman na goudre, emei, se zo certen,  
An Amzer diu d'ho caret ne arruo biouen ;  
Amzer d'ec'h d'am c'haout ne arruo biouen ;  
Pa em boa bolonitez, e voa d'ec'h va gouden.

Me zo eur minor yaouanc e poursui va studi,  
Hac am bezo er blea mân ca za vi l'necon-i,  
Hac am bezo er blea-mân en galon glac'haret  
Estonet bras o velet na en em garriemp qet.

Pa deni an novez-amzer, ar bleu hars er sporn guen,  
E vo calor an dud yaouanc yié ebars pep tâchen,  
Ar fleuron er jardinou a vo tout rejouisset.  
Ha calon an dud yaouanc e pervar c'horn ar bed.

Mes me savo un dourel va lein ar mene,  
Vis-a-vis da dy va mestres ba d'am hini ive,  
Da vouela gant glac'haret d'am amzer tremenel,  
Da ober reflexiou em planeden galet.

Pa voan-me deut ac'hane ur pennad eus e zy,  
Ha me clôvet al lapousset er bot o fredoci;  
Ha me o chom d'o zelaou hac ive complestan,  
Rac ar chanson a ganent a voi sur ravissant.

Cana a rent quer charmaat, cana a rent quer yié,  
Rejouissa a rent calon tout qement o v'hiéve,  
Ma commandojont lavaret dime ive dre o moes :  
Petra dal dide, cloarec, qemer tristidigues ?

Petra ra did en em nec'hi er bed-mâ gant da chang,  
Danve madou zo certen ebars en abond'ng,  
Te so ebars er guer gant da vam ha da dad,  
Ne c'heus n'p nécessite a voed nac a zillad.

Ha me a so e cana ha yié va c'halon,  
Ha ne meus er bed-mâ n'p provision,  
Finissa res hep retard, neuze en un instant  
Ha rentet joans bras calon un den yaouane.

Guechal m'em boa eun amzer a zesolation ;  
Mes bremâ me zo joans, triomphant va c'halon,  
Me a voar e gana bremâ certen, va mignonet,  
Evel an ene a ve barnet da vont l'ar jooustet.

Var ben un neubeut goudre int bet en em gavet  
En ur plac a goste o daou, elec'h m'e doa lavaret,  
Da renta an cil d'eguile ar pez a voa dleet,  
Ha da derri ar bromesse a voa etreze grêt.

Debonjour dec', va mestrez, emezan, prontamant,  
Petra a zo a nevez en ho comportamant ?  
Diveza ma bo cuelis e voa brillant o sellon,  
Ha bremâ n'o remercan nemet o scuil daëlou.

Hac hi ho respont din, ia, en ur guir bér ;  
Chui so ciriec d'am glac'haret, emei, va servicher ;  
Retornet c'hois ur vec'h d'am c'haout, me so content  
Da résina va buez evit cav-t va c'hoant.

Choui, certen plac't yaouane, c'noi certen a so bet  
Ar guenta gouarnerees imprimet em sporet ;  
Mes daëlou va daonlagad o vouela nos ba de,  
O dens va oblijet da chench a volonté.

FIN.



## GUERZ

Var un ton meurbet trist.

TOSTAIT, calonou sansibl, silaouit gant silanç  
Ar recit eus va glac'haret, trista experianç !  
Ar Fortun en e c'holer, deut eus an eureustet,  
Ba dre mouvament e rod e deveus va stringet.  
Ah ! tau età, calon baour ! izella da glemmou ;  
Ro liberte d'am speret da zespeign e boanou,  
C'houi ivez, va d'oulagad, so en em diser'het :  
Va guinou n'ell mui comz, re oc'h eus-i trempet.

Bremâ leun a chagrin, ha va c'horf ba va ene  
Abandonet a grenn d'ar brassa calamite ;

C'houi va oll faculteou ha moderation,  
Evit ma ellin guell prononç va affliction.

O amzer a blijadur, te so ta tremenel !  
Consolation, esperanç, évidomp so collet !  
Allas ! o sonjal rentout parf'eoc'h ar boneur,  
Hor bez bet troublet hor chang, fabrijet hor maleur.

FIN.